

- 17 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

4. SOUN AR GWIN

Bon! bon! ar gwin zo mad
digasit d'omp ni boutaillad.

eur coataer, eur paezand glez
/ar gwin pen em gevez/
ha kement den zo war ar mez
/da holl laouenidigez/
a zo ar gwin ho levenez.
E nep leac'h ne reont eur marc'had
na vez dirak ho daoulagad
gwin evit kenta arrez.
Efet ar gwin gant Per ha Pol
e tarc'hoont ho daou war an dol, bon, bon !

Eur paour kez, eur piler lan
anavezet evit dogan
mar deuz gwin enn e borban
zo mignoun braz d'he amezek
pardoni holl a ra d'he c'hrek
mar en deuz gwin ez e kontan
kontant da zougen kernel
ha da gana betennavel, bon, bon !

Mar komzan euz al leanezed
em euz kalz traou da lavaret
tanoa /ar/ gwin ° a efont ° a-us : zo
kafe, chokola, traou lipouz
a gemeront heb ober trouz
emerken banne flour a lonkont
/ha/ pa deu ° da ratifia ° a-is: ann traon
e komansont holl da gana :
bon, bon ! an dra man zo mad
ma hor befe c'hoaz /eul/ ° lipad ° a-us: peb a

Ar pabed, ar gardinaled
ar rouanez hag ar brinsed
a lez an dour a gostez
ne zervich /nemet/ ° da walc'hi ° a-us: dezho 'met
ho min hag ivez penn /ar/ ° fri. ° a-us: ho
pa vez outhan morlarjez
neuze 'kanont A greiz kalon ° a-us: ho c'hal
ne oufac'h ket war be seurt ton,
bon, bon !

- 18 -

Dan dud chentil ez eo ebad
 efa gwin hag ober chervad
 Leve ho deuz hag arc'hant gwenn
 dezho ne hell mankout nep tra
 hervez ho goad ho deuz pep tra
 Lakaat rinsa ar veren
 rinset kempen ha leun a vin
 e tistro buan deoc'h ho min
 ker buan hag eul luc'heden
 neuze e kanont a greiz kaloun
 ha n'oufac'h ket war beseurt ton,
 bon, bon

Gwelet a riz war an divreac'h
 en deiz all dougen daou vanac'h
 ho daou a urz sant Martin
 ho daou ez oant ken horel
 n'hellent mui en em zerc'hel
 hag o ruilla ho zac'had gwin
 kel leun a oa ho feultrin
 /neuze/ e kanont a greiz ho c'halon
 ne oufac'h ket war be seurt ton,
 bon, bon

enn eur gatredal en deiz all
 eur chaloni mezo mik dall
 deut he dro da gana 'n antien
 sao en he zav da rei an ton
 digor he c'henou evel eur forn
 a denfe anezhi eur c'hoanen
 heman ne zonje e nep tra
 nemed er pezh a zea da gana
 / a griaz a bouez he benn/ :
 bon, bon

boutou prenerien sant fransez
 a lonk ar gwin evel al lez
 er c'houent c'hon diarc'hen.
 studia tam ne bermettont
 habil awalc'h int /mar keront/°
 mar deo ar gwer a zoare.
 pho deuz efet evel toullou
 e kanont holl evit grasou
 bon, bon !

° a-us: war ho
 c'hont

Setu echu brema ar zon
 roit din eur banne braz ha don

(Soun ar gwin)

roit, roit ha roit eleiz
/ha me gano beteg ann deiz/
bon, bon!

dizec'h holl eo va c'hornaillen
na roit ket din eur banne
eur banne braz
dizec'h holl eo va c'hornaillen
diskargit 'ta leiz va gweren
diskargit din hed an deiz
ha me gano gwalc'h va c'halon,
me gano dehoc'h laouen va zon
